

Itron Maerez,
Aotrou Maer,

**Evit ar wech kentañ-tout e Breizh eo bet,
Ofis ar Brezhoneg,
Div Yezh, Diwan, Dihun, Skol An Emsav o kenlabourat,
e diabarzh ar Poellgor Aliañ war ar Vreizhadelezh e Roazhon,
a-benn sevel ur valizennad da reiñ deoc'h peadra
da anavezout ar c'helenn brezhoneg, adalek ar vugaligoù
betek an dud deuet.**

Ijinet ez eus ur benveg pleustrek dave, evit reiñ tu deoc'h :

- da anavezout holl obererien Meurgêr Roazhon hag ar pezh a reont
- da lakaat war-sav en ho kumun un hentad nevezadus ha lañsus, ken war an dachenn deorikel (diazezet war ur preder sirius war an deskiñ yezhoù) ha war an dachenn bleustrek (bras eo ar goulenn er gevredigezh)
- da gemer perzh en ur raktres evit ar Veurgêr, e tiriad ar Gumuniezh Tolpad-kêrioù
- d'ober diouzh politikerezh yezh ar C'huzul-rannvro a-du gant an divyezhegezh, hag a oa bet degemeret a-unvouezh e miz Kerzu 2004

Pep kumun e Meurgêr Roazhon he deus da sammañ he lodenn giriegezh e dazont al liesseurtes yezhel e Breizh. Ar valizennad-mañ a roio tro deoc'h d'ober traoù ha da respont d'ar goulenn zo er gevredigezh a-fet divyezhegezh en ho kumun.

Trugarez deoc'h da deurel pled ouzh ar benveg-mañ. En ho kourc'hemenn emamp. Degemerit hor gwellañ gourc'hemenoù.

Strollad labour, PAAB
Poellgor Aliañ war ar Vreizhadelezh Roazhon

Ofis ar Brezhoneg

10 straed Naonediz 35000 Roazhon - Pgz. 02.23.44.04.30

Diwan - 31 boulouard Portugal 35200 Roazhon

Pgz. 02.99.32.44.50

Div Yezh - 25 straed Pierre Martin 35000 Roazhon

Pgz. 02.99.50.16.95

Dihun - 82 straed ar Groaz Herpin 35700 Roazhon

Pgz. 02.99.38.53.55

Skol an Emsav - 25 straed Pierre Martin 35000 Roazhon

Pgz. 02.99.38.75.83



Ar brezhoneg e Meurgêr Roazhon

e 2005 • 2006



- Kelenn divyezhek a-zarn
- Kelenn unyezhek hepken
- Lec'hiadoù divyezhek publik
- Lec'hiadoù divyezhek katolik
- Lec'hiadoù divyezhek Diwan
- Kelenn brezhoneg er skolaj
- Kelenn brezhoneg el lise
- Kelenn brezhoneg d'an dud deuet
- Kelenn brezhoneg er skol-veur

Poblañs

Hervez kont (diwar roadennoù an EBSSA e 1999)
ez eus **8000** brezhoneger e Meurgêr Roazhon

Kelenn

- Er bloavezh-skol 2005/2006 e oa **ouzhpenn 1200 den o teskiñ brezhoneg** :
 - **524** skoliad er c'helenn divyezhek.
 - **247** studier enskrivet er gevrenn brezhoneg ha keltieg.
 - **184** skoliad oc'h heuliañ kentelioù brezhoneg evel danvez dibab (130 anezho zo studierien).
 - war-dro **400** oadour o teskiñ brezhoneg er c'hentelioù noz, e 5 kumun.
- Ouzhpenn tric'hemmet eo bet sifroù ar c'helenn divyezhek dindan 10 vloaz.
- Roazhon, gant 422 skoliad, eo ar gêr eus Breizh ma'z eus ar muiañ a skolidi en hentad divyezhek kentañ derez.
- Emañ ar skolidi divyezhek o tont eus 50 kumun : 22 gumun eus Meurgêr Roazhon ha 43 c'humun eus Bro Roazhon.

Tro-dro d'ar skol

- Daou framm a ginnig obererezhioù dudi e brezhoneg evit ar vugale, en o zouez ur greizenn dudi hep herberc'h.
- Ur raktres magouri divyezhek zo e Roazhon.

Buhez foran

- Panelloù e brezhoneg zo evit mont e-barzh ha mont e-maez kumunioù Roazhon ha Saozon-Sevigneg.
- 130 plakenn straed e brezhoneg zo bet staliet e Roazhon.
- Panelloù divyezhek zo en arsav metro an "ti-gar" e Roazhon

Kevredigezh keodedel

- Ouzhpenn kant post labour zo liammet ouzh ar brezhoneg.
- Brasoc'h eo ar c'hinnig obererezhioù e brezhoneg amañ eget e lec'h all.
- E-touez elfennoù yezh all, menegomp ur gourmarc'had, divyezhek e Gwern-ar-Sec'h.
- Lod eus ar mediaoù brezhonek pouezusañ zo staliet e Roazhon (Frañs 3 Kornôg, Bremañ, Bremaik, Gwagenn TV, Radio fr. Glas Arvorig, RCF Alpha...).

> Darempred



Servij Arsellva ar Brezhoneg

10 straed Naonediz 35000 ROAZHON • Pgz : 02 23 44 04 33
catherine.bouroulleg@ofis-bzh.org • www.ofis-bzh.org

Traoù d'ober en ho kumun

Rue
de FOUGÈRES

Straed
FELGER

VERN
VAL D'ORSON
GWERN
TRAON ORSON

*Vous remercient
de votre visite*

A bientôt

*ho trugarekaat
da vezañ deuet*

Ken ar wezh all

Tresomp bremañ amzer-da-zont ar brezhoneg

Ar brezhoneg zo d'an holl
e Breizh, sed ar pezh
a soñj ar Vretoned.

Bremañ e vo treset dazont ar yezh ha
gwelet a reer kenfeur ar vrezhonegerien o kreskiñ
e-touez ar re yaouankañ dija.

Evit kadarnaat an tuadur-se e vo ezhomm
eus nerzh holl obererien ar vuhez sokial
ha dilennidi ar vro dreist-holl.

Ur politikerezh yezh eeun hag aes

Gant skoazell Ofis ar Brezhoneg e c'hall pep kumun lakaat e
pleustr ur politikerezh yezh eeun, efedus ha marc'hadmat :

- divyezhekaat ar panneloù-heñchañ, panellerezh ar savadurioù publik,
ar panneloù touristel, ar plakennoù straed
- kas an divyezhegezh war-raok en darempredoù gant ar velestridi
(kannadig kêr, follennoù-pleg, lec'hienn genrouedad, furmskridoù
melestradurel)
- kinnig da implijidi ar gumun deskiñ brezhoneg e framm ar
stummerezh dibaouez
- harpañ da lakaat war-sav un hentad kelenn divyezhek

Ar skoaziadennoù

Buhez foran – Panneloù divyezhek

Gant ar C'huzul-rannvro e vez roet ur skoaziadenn arc'hant d'ar
c'humunioù a ziviz mont war hent an divyezhegezh er vuhez foran
(da skouer : ar skoaziadenn evit staliañ panneloù divyezhek dre
hanterouriezh ar gevrat bro).

Skolioù – Sevel tiez-skol

Gant ar C'huzul-rannvro, e framm he folitikerezh tiriadel ha dre
hanterouriezh ar gevrat bro, e vez harpet ar c'humunioù evit
arc'hantaouiñ ar sevel klasoù pe skolioù divyezhek publik.

An darempred o devez ar Vretoned gant o yezh

Hervez ur sontadeg kaset da benn e 2001 ez eus 82%
eus keodedourien Breizh a-bezh a gav dezho ez eo ar
brezhoneg o yezh rannvroel. Ouzhpenn-se e soñj da
92% eus ar Vretoned e ranker gwareziñ ar yezh-se.
Al lusk brasoc'h-bras zo evit adpiaouañ ar yezh abaoe
ar bloavezhioù 70 zo test eus al liammoù kreñv-se.

Ar brezhoneg a c'haller deskiñ

➤ Kresk ar c'helenn divyezhek

Kenderc'hel a ra ar c'helenn divyezhek da greskiñ e
Breizh abaoe m'eo bet krouet e 1977.

UI lamm a 50,1 % ez eus bet e-doug ar 5 bloaz
tremenet evit erruout gant 11 092 skoliad en distro-
skol 2006. Rannvro Breizh he deus lakaet da bal
tizhout 20 000 skoliad e 2010. Kement-se a dalvez e
vo ret digeriñ ur bern klasoù er skolioù-mamm.
Hollbouezus eo roll ar c'humunioù enta.

➤ War vicherelaat ez a an aozadurioù a ginnig kentelioù d'an dud deuet ha niverusoc'h ha liesseurtoc'h e teu ar c'hentelioù da vezañ

➤ Nevez zo eur krog da ginnig stummadurioù micherel e brezhoneg ha mont a ra mat-tre war-raok

Ar brezhoneg a c'haller ober gantañ

➤ Er mediaoù :

Abaoe pell ez eus brezhoneg er c'hazetennoù hag
er c'hleweled, ha kenderc'hel a ra ar yezh da vont
war-raok war dachennoù all, ha muioc'h-mui war hini
an teknologiezhioù nevez.

Frañs 3 Kornôg, TV Breizh, Frañs Glas Arvorig, Ouest France,
Ya !, Bremañ, Bremaik, An Tour Tan, Stalig, Wikipedia, Gwagenn TV,
Brezhoweb hag all.

➤ Er vuhez foran :

Ouzhpenn ugent vloaz zo ez eus meur a strollegezh
lec'hel zo krog gant politikerezhioù evit kas
ar brezhoneg war-raok :

panelloù mont e-barzh ha mont e-maez ar c'humunioù, panneloù-
heñchañ, panellerezh divyezhek hag all.

➤ E bed an armerzh :

Ar brezhoneg a zegas labour : hervez un enklask kaset
da benn gant Ofis ar Brezhoneg ez eus mil implij
bennak ma tle al labourerien bezañ barrek war ar
brezhoneg (e metoù an deskadurezh evel-just, e bed
an embann, an treiñ, ar servijoù nes hag all). Brasoc'h
eo ar goulenn a-berzh an enfrederien eget ar c'hinnig
ha kenderc'hel a ra da greskiñ; setu m'eo tost sur ar
vrezhonegerien da vevañ ha da labourat er vro.



> Darempred

Servij Arsella ar Brezhoneg

10 straed Naonediz 35000 ROAZHON • Pgz : 02 23 44 04 33
catherine.bouroulleg@ofis-bzh.org • www.ofis-bzh.org

Deskadurezh divyezhek Publik
brezhoneg-galleg par-ouzh-par
DIV YEZH
338
Kelc'hlizher niv. 2001-167 eus ar 05/09/2001 gant ministrerezh an Deskadurezh-Stad Kevrat Steuñv Stad/Rannvro

Skol divyezhek Kevredigezhel
dre soubidigezh brezhoneg-galleg
DIWAN
123
Dindan kevrat kevredañ gant ar Stad ha Diwan Breizh

Deskadurezh divyezhek Katolik
brezhoneg-galleg par-ouzh-par
DIHUN
90
Dindan kevrat kevredañ gant ar Stad

Begerel
Sevinieg (22)
Menezalban
Rovelieg
Plevezeg

Mousterel-an-Il
Sant-Albin-Elvinieg
Magoerioù-ar-C'houdenon



Ar memes pal gant Div Yezh, Diwan, Dihun

- Kregiñ a ra ar c'helenn divyezhek adalek ar skol-vamm, gant rummad ar re vihan, ar re grenn pe ar re vras, ha kenderc'hel a ra betek al lise
- Programmoù ofisiel an Deskadurezh-Stad a vez heuliet gant ar gelennerien
- Digor eo ar c'hlasoù divyezhek d'an holl vugale, o tont eus familhoù brezhonegerien pe get, gant ma vo kennerzhed ar vugale gant o ziegezh

Deskiñ e **brezhoneg** hag e **galleg** a zegas spletoù an **divyezhegezh abred**

- Sikour a ra ar vugale da vezañ en o bleuñv, e kenemglev gant o endro sokial, trivliadel ha sevenadurel
- Skoazellañ a ra ar vugale da ziorren o barregezhioù deskiñ ha dielfennañ
- Aesaat a ra dezho deskiñ hag implijout yezhoù all, ha deskiñ danvezioù skiantel
- Lakaat a ra ar vugale da vezañ digor d'ar sevenadurioù all ha da gompren anezho
- Broudañ a ra an darempredoù etre ar rummadoù oad
- Ur splot eo evit un dazont micherel e Breizh

Anvioù ar
c'humunioù | Kumunioù orin ar vugale skoliataet
en un hentad divyezhek

- ▲ Lec'hiadoù divyezhek publik
- Lec'hiadoù divyezhek katolik
- Lec'hiadoù divyezhek Diwan

Hor pal = bezañ ken barrek war an
eil yezh hag eben e fin ar c'hentañ derez



An deskadurezh publik-Div Yezh

Bloavezh-skol 2006/2007

Klasoù divyezhek publik zo e 2 gumun diwar ar 37 zo e Meurgêr Roazhon

➤ **338 skoliad** zo dasparzhet etre

- 2 skol-vamm
- 2 skol gentañ
- 1 skol kentañ derez
- 1 skolaj
- 1 lise

Emañ ar familhoù o tont

- eus 11 kumun e Meurgêr Roazhon
- eus 14 kumun e Bro Roazhon
- de 7 kumun e lec'h all

Andolieg-Kernevez, Lanvezhon, Bruz, Saozon-Sevigneg, Kantpig, Karnod, Kavan, Goven, Gwizien, Gwipri, Lalieg, Paziég, Pont-Rigan, Roazhon, Rovelieg, S.-Albin-Elvinieg, S.-Jili-Roazhon, S.-Gregor, S.-Jakez-al-Lann, S.-Marzh-an-Il, S.-Senour.

Raktresoù an deskadurezh divyezhek publik

- Digeriñ lec'hiadoù nevez er c'hentañ derez
- Kenderc'hel gant an eil derez e lec'hiad Bruz
- Kement-ha-kement a vrezhoneg hag a c'halleg er skolaj hag el lise

Ar bedagogiezh

Kement-ha-kement a vrezhoneg hag a c'halleg adalek ar skol-vamm hag a-hed an amzer-skol evit lakaat ar skolidi da vezañ ken barrek war an eil yezh ha war eben, dre gomz ha dre skrid, e fin ar skol kentañ derez.



Lise JEAN MACÉ

Hentad divyezhek adalek an eil klas betek ar c'hlas termen

Danvezioù kelennet e brezhoneg : brezhoneg, istor-douaroniezh

Skolaj ANNA VREIZH

Hentad divyezhek adalek ar 6^{vet} klas betek an trede klas

Danvezioù kelennet e brezhoneg, istor-douaroniezh, jedoniezh, arzoù neuziañ, sonerezh

Skol gentañ AR FRANKIZ

Klasoù : 4 divyezhek + 4 unyezhek

Skol-vamm AR FALBONT

Klasoù : 3 divyezhek + 3 unyezhek

Skol LES GANTELLES

Klasoù Skol-vamm : 2 divyezhek + 8 unyezhek

Klasoù Skol gentañ : 2 divyezhek + 10 unyezhek + 1 c'hlas kenemprañ (CLIS)

Skolaj

Kendalc'h en distro-skol 2009

Skol gentañ J.PRÉVERT

Klasoù : 1 divyezhek + 7 unyezhek

Skol-vamm J.PRÉVERT

Klasoù : 1 divyezhek + 4 unyezhek

Div Yezh,
div yezh
evit deskiñ
ha bevañ
al liesseurted
er skol publik

Lec'hiad Roazhon 1 : digoret e 1983

Lec'hiad Roazhon 2 : digoret e 1999

Bruz : digoret e 2003

DIV YEZH (Kevredigezh tud ar vugale evit ar c'helenn brezhoneg er skol publik)

> Lec'hiadoù diazezet

Div Yezh - Bro Roazhon

25 straed Pierre Martin - 35000 Roazhon
Pgz 06 50 54 11 21
div.yezh.roazhon@free.fr

Div Yezh - Bruz

4 straed ar Glizin - 35890 Lalieg
Pgz 02 99 42 35 14
divyez.h.bruz@free.fr

> Evit digeriñ lec'hiadoù nevez

Div Yezh-skourr evit an diorren

25 straed Pierre Martin - 35000 Roazhon
Pgz 02 99 50 16 95
judith.div.yezh@wanadoo.fr

www.div-yezh.org



Ar skolioù kevredigezhel-Diwan

Bloavezh-skol 2006/2007

Ur skol divyezhek kevredigezhel zo en 1 gumun diwar ar 37 zo e Meurgêr Roazhon

➤ **123 skoliad** zo

➤ 1 skol kentañ derez

Emañ ar familhoù o tont

- eus 10 kumun e Meurgêr Roazhon
- eus 15 kumun e Bro Roazhon
- eus 11 kumun e lec'h all

Bourvarred, Kantlou, Kantpig, Kavan, Domloup, Gwizien, Chapel-ar-Veuzid, Chapel-Felgeriz, Lalieg, An Alloz, Gwerzher, Magoerioù-ar-C'houenon, Neveztell, Noal-ar-Gwilen, an Heizeg, Paziég, Pantieg, Pleheneg, Pleveleg, S.-Gondran, S.-Jakez-al-Lann, Servon, Sevinieg, Gwern-ar-Sec'h, Gwezin.

Raktresoù ar skolioù divyezhek kevredigezhel

- Digeriñ lec'hiadoù kentañ derez nevez en Il-ha-Gwilen
- Digeriñ ur skolaj Diwan e Roazhon
- Digeriñ ur vagouri divyezhek

Ar bedagogiezh

Kelenn e brezhoneg dre soubidigezh. Tamm-ha-tamm e vez degaset galleg adalek ar c'hlas KD1 evit bezañ a live gant ar vugale unyezhek e dibenn KD2, en div yezh. Ar brezhoneg eo yezh ar vuhez sokial hag ar gedyezh er skol ivez, ar pezh zo dibar da Ziwan.

Lise DIWAN KARAEZ Lise divyezhek adalek an eil klas betek ar c'hlas termen
Raktres : klas europat
Danvezioù kelennet e brezhoneg : brezhoneg + an danvezioù all
Danvezioù kelennet e galleg : galleg ha prederouriezh
Danvezioù kelennet e yezhoù estren : yezhoù estren + raktres evit 1 danvez all

Skolaj DIWAN GWENED

Hentad divyezhek adalek ar 6^{vet} klas betek an 3^e klas

Danvezioù kelennet e brezhoneg : brezhoneg + danvezioù all

Danvezioù kelennet e galleg : galleg + studiañ ar c'heriaoueg en holl zanvezioù

Danvezioù kelennet e saozneg : saozneg, skiantoù ar vuhez hag an douar

Skolaj DIWAN ROAZHON

**RAKTRES
DIGERIÑ**

Skol DIWAN

6 klas divyezhek
skol-vamm ha skol gentañ

Lec'hiad Roazhon 1 :
Digoret e 1978

Skolaj DIWAN PLIJIDI

Hentad divyezhek adalek ar 6^{vet} klas betek an 3^e klas

Danvezioù kelennet e brezhoneg : brezhoneg + danvezioù all

Danvezioù kelennet e galleg : galleg + studiañ ar c'heriaoueg en holl zanvezioù

Danvezioù kelennet e saozneg : saozneg, skiantoù ar vuhez hag an douar

Diwan,
evit bevañ
e brezhoneg
bemdez

> Darempred

DIWAN (Kevredigezh skolioù divyezhek dre soubidigezh laik ha digoust)

31 boulevard Portugal, 35200 ROAZHON • Pgz : 02 99 32 44 50
skol@diwan-bro-roazhon.org • www.diwan-bro-roazhon.org



An deskadurezh katolik-Dihun

Distro-skol 2006/2007

Klasoù divyezhek katolik zo en 1 gumun diwar ar 37 zo e Meurgêr Roazhon

➤ **90 skoliad** zo dasparzhet etre

- 2 skol kentañ derez
- 1 skolaj

Emañ ar familhoù o tont

- eus 6 kumun e Meurgêr Roazhon
- eus 7 kumun e Bro Roazhon
- eus 2 gumun e lec'hioù all

Saozon-Sevigneg, Kastell-Geron, Kavan, Kreven, Menezalban, Mousterele-an-II, an Heizeg, Roazhon, Gwern-ar-Sec'h.

Raktresoù an deskadurezh divyezhek katolik

- Digeriñ ul lec'hiad nevez en ur gumun eus Meurgêr Roazhon
- Danvezioù kelennet par-ouzh-par e brezhoneg hag e galleg er skolaj

Ar bedagogiezh

Kement-ha-kement a eurvezhioù brezhoneg ha galleg adalek ar skol-vamm.

Deskiñ lenn e galleg e KP, danvezioù dihuniñ e brezhoneg.



**Lec'hiad
Roazhon 1**
digoret e 2000

**Skol
S. MIKAEL**

- 70 skoliad
- Klasoù :*
- 4 divyezhek +
- 11 unyezhek

**Skolaj
S. HELER**

- abaoe 2004
- Kelenn e brezhoneg :*
- 3 eurvezh brezhoneg

**Lec'hiad
Roazhon 2**
digoret e 2006

**Skol
YANN BOSCO**

- 15 skoliad
er skol-vamm

*Dihun,
meur a yezh
adalek
ar skol-vamm*

> Darempred

DIHUN (Kevredigezh tud ar vugale en deskadurezh divyezhek katolik)

82 straed ar Groaz Herpin, 35700 ROAZHON

Pgz 08 78 20 25 18 • dihun.bro.roazhon@free.fr • <http://dihun.bro.roazhon.free.fr>



Ar stummerezh evit an dud deuet-Skol An Emsav

Skol An Emsav

Distro-skol 2006/2007

Kentelioù brezhoneg a vez kinniget d'an dud deuet gant ar pol brezhoneg, e Meurgêr Roazhon hag en Il-ha-Gwilen, gant :

➤ **300** oadour o teskiñ

➤ en o zouez **160** zo eus Meurgêr Roazhon

Emañ an dud-se o tont eus 26 kumun e Meurgêr Roazhon


Karnod, Gwezin, Kantpig, S.-Jakez-al-Lann, Gwerzher, Bruz, Noal-Kastellan, S.-Armael, an Heizeg, Torigneg-Fouilharzh, Kavaneg, Morzhell, Saozon-Sevigneg, Brec'heg, Noal-ar-Gwilen, Menezgervant, S.-Jili-Roazhon, Bredual, ar Peniti, Reuz, Eginieg, Paziég, Sant-Gregor, Gwern-ar-Sec'h, Lanvezhon, Parzheneg, Roazhon.

E Pol Brezhoneg Skol An Emsav e kinniger :

- Kentelioù evit an dud deuet e-pad an deiz ha diouzh an abardaez
- Sizhunvezhioù d'an daoulamm (35 eurvezh), etre miz Here ha miz Gouere
- Stajoù arbennik war danvezioù resis d'ar Sadorn
- Devezhioù adwelet pe adaptout e fin ar sizhun
- Stummadurioù hir 6 miz (kursus klok) evit an dud a fell dezho mestroniañ ar yezh dindan bloaz (840 eurvezh kelen). Tud adheñchet, klaskerien labour, tud ar vugale en hentadoù-skol divyezhek, studierien...

Bez' ez eus ivez :

- Ur sal-emzeskiñ liesvedia : Dizolo



*Skol An Emsav
eo hoc'h ambrouger
evit stummañ
an dud deuet*

> Darempred

Skol An Emsav (Aozadur pourchas stummadurioù micherel marilhet gant prefed Rannvro Breizh)

25 straed Pierre Martin 35000 ROAZHON • Sekretouriezh : 02 99 38 75 83 • Renerezh : 02 99 87 69 12 • plr : 02 99 63 82 28
sae.bzh@wanadoo.fr • www.skolanemsav.com



Aozadur ar politikerezh yezh Ofis ar Brezhoneg

Pal pennañ

Termenañ ha kas da benn an oberoù zo da embreger evit brudañ ha diorren ar brezhoneg war gement tachenn zo er vuhez sokial ha foran.

Servijoù

➤ Ajañs Diorren :

aliañ hag ambroug an holl gevelerien (publik pe get), krouiñ al liammoù a bouez bras evit dazont ar brezhoneg, war dachenn ar c'helenn da skouer.

- Pgz : 02 51 82 48 37
- visant.roue@ofis-bzh.org

➤ Arsella ar Brezhoneg :

studiañ, dielfennañ ha lakaat da anavezout stad ar brezhoneg a-benn gwellekaat kement tra a vo graet evit staliañ ur politikerezh terkerezh yezhel

- Pgz : 02 23 44 04 33
- catherine.bouroulleg@ofis-bzh.org

➤ Treiñ-Aliañ :

kinnig ur yezh vodern ha resis evit kas an divyezhegezh war-raok er vuhez foran.

- Pgz : 02 23 44 04 31
- rozenn.morvan@ofis-bzh.org

➤ Termbret, kreizenn dermenadurezh :

studiañ an dermenadurezh hervez un hentenn skiantel war an tachennoù nevez digoret d'ar brezhoneg a-benn erbediñ implij termenoù skoueriekaet.

- Pgz : 02 23 44 04 37
- fulup.travers@ofis-bzh.org

➤ Glad Yezhel :

dastum, mirout, ober war-dro ha skignañ glad dre gomz ha dre skrid ar brezhoneg.

- Pgz : 02 98 99 30 14
- marc.cochard@ofis-bzh.org

emglev an 21^{vet} kantved

Ya

d'ar brezhoneg

An emglev
"Ya d'ar
Brezhoneg

- "Ya d'ar Brezhoneg", soñjet da gentañ-penn evit oberourien ar gevredigezh keodedel, a oa bet digoret e dibenn 2004 d'ar strollegezhioù lec'hel.
- Ar pennadurezhioù lec'hel o devez da zibab e-touez 28 ober ar re a fell dezho kas da benn vat. Hervez niver an oberoù dibabet gant ar gumun ha hervez hec'h emouestl, e vo roet dezhi unan eus an **tri live testeniekadur**.
- Gant **64 strollegezh** eo bet sinet an emglev dija, **15 sinadur** all zo war ar stern.

*Ofis ar Brezhoneg
eo ho penveg da gas
oberoù war dachenn
ar politikerezh yezh*

> Darempred

Ofis ar Brezhoneg

10 straed Naonediz 35000 ROAZHON • Pgz : 02 23 44 04 30
ofis35@ofis-bzh.org • www.ofis-bzh.org